

Jaffrennou (Taldir)

Teatr Brezoneg Pobluz

Karhêz. Moullerez ar Bobl. (1911)

Taldir, Jaffrennou, bet ganet e Karnoed e 1879, marvet e Bergerac e 1956.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Tennet eo ar pezh-c'hoari-mañ euz al leor

Teatr Brezoneg Pobluz Karhêz. Moullerez ar Bobl. (1911)

Embannet e oa bet al leor-mañ e Karhêz gand moullerez ar Bobl (kelaouenn Taldir), ha war eun dro e Pariz, e ti Champion.

Al leor-mañ a zo kinniget

D'an Aotrou Emil ar C'hloareg

Mêr Plouian, Kannad Montroulez er Parlamant.

An *Teatr Brezoneg* a oa kouezet en e boull, pa adsavas an Aotrou Ar C'hloareg eur strollad en Plouian. Homañ a roas eun displegadenn gaer-murbed a Vuhez Sant Gwenole, ar Sul 14 a viz Eost 1898. War an heveleb tro e oe krouet *Kevredigez Broaduz Breiz*, ar genta vreuriez a spered breizad.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Levezonet eo Taldir gand ereadurez ar galleg. Da skwer e skriv :

war an daboulin-ma'

C'hwi a hallfe, Itron, eur pennad azeza,

pa vefe e brezoneg mad :

war an daboulin-ma'

E hallfeh, Itron, eur pennad azeza,

Implijoud a ra ivez geriou galleg brezonekaet gantañ.

Ar poeltron mezo

Unangomz

(Heñvelekaet ouz ar galleg)

War an teatr e vezo lakaet eur spontaill

Kana 'ra

Tra la la, la l la !

Komz a ra

Non di toud, kaer am-eus kana
Red mad e vo din distana
Ha distrei d'ar gêr heb eur hann !
Koulskoude ma gwad a zo tan
Ha biskoaz n'on bet ken hardi
Hag hirio... Malarh du ! Pari
Ne zeuio den da stourm ama' !
Beza zo pevar gwaz, ola !
Ya, pevar hag a hoantafe
Dond an eil goude egile ?
Me n'am-eus aon 'raog den ebed...
... Mar n'eo pemzeg vloaz tremenet !...
N'eus ket pell c'hoaz, war ma feiz dall,
'Oan en ostaleri Fañch Fall
Ha me chikana deuz daou waz
Ha goulenn aneze war ar plas.
Ar henta am-boa diskaret,
Mez an eil o vond da daped
Eur voutaill war ar hontouer
Hag o trei anezi 'barz an êr.
-« Ola ! 'mon-me, leh he zerri,
Evom anezi etre on-tri ! »

*(Azeza a ra hag e tap eur voutaill deuz e hodell evid lonka
eur banne. Neuze ar spontaill a wigour gan an avel).*

Petra 'ra trouz ? Daonet 'vin ket.
Me n'am-eus aon 'raog den ebed,
Ma tostao neb a hoanta
Leda e gein war al leur-ma'.

(Eva 'ra eur banne).

Peleh ema neb a lavar
'On-me spontig evel eur yar ?
Pevar den, dioustu, pevar gwaz
A houlenan krak war ar plas.

(Trei a ra, hag e wel ar spontaill).

Jezuz !... Oll zent ar Baradoz !...
Petra eo hemañ ? Mil malloz.
Eur hornandon ! Eul laer bennag !
Amañ 'vad e kavin eur stag !
Hep-la, paotr, ne laran mann dit,

Lez ahanon da vond e-kuit.

(Ar spontaill a hij gand an avel).

Deuz eur paour-kêzig bet¹ truez !
Aotrou ! Lezit ganin ma buhez !
Sed, Aotrou, kemerit ma zok
Ha lezit ahanon dichipot.

(Ar spontaill a hij hag a dro).

Dalit c'hoaz ma boutaill gwin gwenn
Ha ma hontell ha ma direnn...
Nann, zur, evid droug ne rin ket,
Mez ma lezit bremañ da voned.
C'hoant mervel n'am-eus ket bet c'hoaz
Ha c'hwi a zeblant eur pezh gwaz.
Setu 'ta ma botou neve',
Mez bremañ 'h an kuit, war ma fe'...

(Ar spontaill a dro).

'N an' Doue, ho min 'zo gwall-du !
Na vrallit ket 'trezeg ma zu !...
Pardon, Aotrou, a houlenan !
Sed, ma chupenn c'hoaz a roan.

(Diwiska a ra e chupenn).

O ! n'am lazit ket, me ho ped,
Eur peher braz 'on war ar bed,
Ha mar tennit ma zamm buhe'
Er bed all peleh e vin-me ?
Hag ouspenn, me 'm-eus prometet
Mond da Zantez-Anna Wened,
Ha mar ben² lazet dioustu-krenn
Ne varvin ket 'vel eur hristen.
Lezit ahanon da lavared
Eur baterig c'hoaz, me ho ped...
Mez na rit ket ken fall sellou.
Na skoit ket... Aotrou... Aotrou !
Me, biskoaz den n'am-eus skoet.
Chas, avad, ne zislaran ket.

(Ar spontaill a dro hag a gouez war an douar).

Jezuz !... Aotrou ar hornandon,
Teurvezit rei din ho pardon
Rag n'eo ket me, nann, sur n'eo ket,
Am-eus bremañ ho tiskaret,
Gortozit, me ho sikouro
Da zavel plomm war ho seulio'.

¹ bet truez : bezit truez.

² mar ben : mar bezan.

*(Ar poeltron mezo a dosta hag a wel penaoz eur spontaill
brini an hini eo).*

Daonet 'vin ket ! Tan ha kurun !
Malah du war ma horn-butun !
An diaoul-mañ ne 'n-eus troad ebed
Na daouarn ivez kennebeud !
Eur vroz eh eo, eur hoz bragou,
Karget a blouz hag a druillou.
Hañ !... Setu amañ eur fars vrao !
Me 'garje kaoud dindan ma fao
An higin³ louz e-neus, dre fent,
Plantet eur spontaill war ma hent !
Me 'rafe dezañ paea ker
Ober goap deuz Laou al Lonker.

(Dorna 'ra ar spontaill).

M'ho tesko, spontaill leun a foenn,
D'ober goap ezu ar gristenien.
Ha bremañ, m'ho kaso ganin.
Ho tillad, bepred, a vo din.
Hag ar plouz a zo en ho rer⁴
A ray torchou em botou-ler !

(Mond a ra kuit, ar spontaill war e gein).

³ An higin : ? An higenn (?)

⁴ rer : reor.